


## Pavezadennoù

A-viskoazh o deus klasket ar gizellerien, arzourien, livourien, doareoù da leuniañ ar plaen gant tresadennoù reoliek : an teknikoù-se a implij treuzfur-madurioù ar plaen evel ar simetriezh-ahel, ar simetriezh-kreizenn, an trañslatadur ...

Amañ da skwer ur bavezadenn eus Palez an Alhambra e Grenada (XIV<sup>vet</sup> kantved), lec'h ma kaver skwerioù eus pep hini eus an doareoù da baveziñ ur plaen.



Un arzour izelvroat, Mauritz Cornelis ESCHER (1898-1972) en deus bet labouret e vuhez pad war an dachenn-se, ha war an doareoù da daolenniñ gant tresadennoù arzel fenomenoù matematikel. Setu amañ ur bavezadenn savet gantañ en 1938 :

